


VENI CREATOR



E-ni, Cre-à-tor Spi-ri-tus, Mén-tes tu-ó-rum vi-si-ta : Im-ple
2. Qui dí-ce-ris Pa-rá-clí-tus, Al-tis-sí-mi dó-num Dé-i, Fons vi-

1. su-pérna grá-ti-a Quæ tu cre-ásti pé-ctora.
2. vus, ignis, cá-ri-tas, Et spi-ri-tá-lis úncti-o.

1. Veni, Créator Spíritus ;
mentes tuórum visita,
imple supérna grátia
quæ tu creásti pectora.
2. Qui díceris Paráclitus,
altissimi donum Dei,
fons vivus, ignis, caritas
et spiritalis unctio.
3. Tu septifórmis múnere,
dígitus patérnæ dexteræ,
tu rite promissum Patris,
sermóne ditans gúttura.
4. Accénde lumen sénsibus,
infúnde amórem córdibus,
infirmi nostri córporis
virtúte firmans pépeti.

5. Hostem repéllas lóngius,
pacémque dones prótinus ;
ductóre sic te prævio
vitémus omne nóxium.
6. Per te sciámus da Patrem,
noscámus atque Filium,
teque utriúsque Spíritum
credámus omni témpore.
7. Deo Patri sit glória
et Filio, qui a mórtuis
surréxit, ac Paráclito,
in sæculórum sæcula. - Amen.

An Aotrou Doue ganeoh.
Ha gand ho spered.
Pennad euz an Avel santel hervez sant N...
Gloar deoh hwi, Aotrou Krist.

SANT RONAN, OR PATRON

Sant Ronan, or patron, ni ho ped a galon
Mirit en an' Doue or horv hag on ene !

- | | |
|---|---|
| 1. Kaer eo diouz ar mintin
Ar gliz er parkeier :
Kaer ho pennoz divin
Warnom e peb amzer. | 6. Nann, nann rag ho kalon
Morse n'eo bet sklaset
Nann galloud or patron
Morse ne ve berreet. |
| 2. Ar pinvidig, ar paour,
Amañ 'zo daoulinet ;
E-leh danvez hag aour
Dezo roit eürusted. | 7. Evid gloar hoh ano
Diredit d'or zikour,
Kasit pell diouz ho pro
Kasit an enebour. |
| 3. Roit ive 'vel gwehall
Yehed d'ar glañvourien !
Deuit ato d'on diwall
Ouz ar vreh ar vosenn. | 8. Ma n'or selaouit ket
Ni ielo d'an daoulin
'Vid en em glemm bepred
Dirag sant Kaourintin. |
| 4. Bleizi 'zo bet gwelet
Tro-war-dro d'ho lochen
Bleizi 'zo kounnaret
Ouzom, ouz or hredenn. | 9. C'hoant on-eus da veva
E skeud ho tiouaskell ;
Chom heb ho servicha,
Kentoh mil gwech mervel. |
| 5. An anevaled gouez
Pell diouzoh a dehe
Hag ar bed didruez
Treh 've d'ho pugale ? | 10. Oll epad or buhe
Ni ho pedo laouen
Da hedall mond d'an neñv
D'ho meuli da viken. |



**DISKAN Gloar da Zoue e lein an Neñv
ha peoh d'an dud war an douar.**

- | | |
|--|--|
| 1 Bezit meulet, Aotrou Doue,
mil bennoz deoh ha trugare,
adreuz ar bed n'gan ho kloar,
ho kalloud hag esked dispar. | 3 Meuleudi deoh, Salver Jezuz,
gwir vab d'an Tad karantezuz,
Oanig Doue, treh d'ar pehed,
Ho pet truez ouzom bepred. |
| 2 Ni hoh ador, Doue an Tad,
Roue an Neñv, Doue oll-vad,
ken braz eo bet ho karante,
m'ho peus kaset ho Mab er bed. | 4 Klevit pedenn ho tud fidel.
Roue ar bed, savet d'an neñv :
da viken gand ar Spered glan,
on Doue beo, e gloar an Tad. |

MEULOM OLL DA VIKEN

D. Meulom oll da viken Jezuz gwir Doue, gwir den (2 w.)

- | | |
|---|---|
| 1- Me ho meul, o va Jezuz
C'hwí ho-peus va hrouet,
C'hwí ho-peus va frenet,
C'hwí am mag, o va Jezuz ! | 3- Kalz am-eus pehet, Jezuz,
En amzer dremenet;
Pa 'z on bet pardonet,
Me vo fidel deoh, Jezuz ! |
| 2- Mil bennoz deoh, o Jezuz,
C'hwí a zo va fastor.
C'hwí a zo va zeñzor,
C'hwí 'zo va oll vad, Jezuz ! | 4 Bennigit, o va Jezuz,
Va horv ha va ene;
Va mirit noz ha de
Ouz kement droug 'zo,
Jezuz ! |
| 5- Ra vezo meulet Jezuz,
Dre oll, e peb mare,
Ni, bemnoz ha bemde,
Meulom oll, meulom Jezuz ! | |

**M'HOH ADOR, DOUE,
VA HROUER**

- | |
|---|
| 1- M'hoh ador Doue, va Hrouer,
M'hoh ador Jezuz, va Zalver,
Me 'zo amañ war va daoulin
'Vid ho pedi diouz ar mintin. |
| 2- Mil bennoz deoh, o va Aotrou,
Evid hoh oll madoberou :
D'am beza greet, prenet, miret,
Hag en hoh lliiz kemeret. |
| 3- Kement a rin, a lavarín,
A houzañvin hag a zoñjin,
A ginnigan evid ho kloar,
Keid ha ma vin war an douar. |

PEUR E TEUIO ?

SPERED SANTEL

- 1- Spered Santel, Spered a sklerijenn,
Plijet ganeoh ennom bremañ diskenn :
A sklerijenn, kargit or sperejou,
A garantez, tommit or halonou.
- 2- An Ebestel, en eur zal unanet,
Gand nerz ho kras ho-peus bet entanet;
Ra vo 'vidom ken braz ho madelez :
Hebdoh ne d'om nemed sempladurez.
- 3- Gwerhez Vari, esperañs ar peher,
Pedit Jezuz, ho Mab hag or Zalver;
Grit d'or spered kompren komzou Doue,
Ha d'or halon o mired goudeze.

**D. Deuit ganeom, ma vim laouen,
Ezomm on-eus euz sklerijenn
Ma 'z aim ganeoh war hent ar peoh.**

- 1- Pour e teuiio en on tiez ?
Pour e vleunio en or buhez
Ar helou mad, kelou ar peoh ?
- 2- Pour e vezo ar bed d'ar paour ?
Pour e savo war on labour
Ar helou mad d'en em zikour ?
- 3- Pour e teuzo ennom ar skorn ?
Pour e kano e-kreiz on dorn
Ar helou mad, kelou a joa ?
- 4- Pour e kresko e-touez an oll ?
Pour e youho an avel foll
Ho kelou mad 'vid ar bed oll ?


MAGNIFICAT

- 1- Meuleudi d'an Aotrou Doue,
Gand levenez 'trid va ene;
Gand karantez e-neus sellet
Ouz izelded eur plah a feiz,
Ha da viken poblou ar bed
A vennigo eur plahig kêz.
- D. Magnificat ! Joa d'an dud vad !
Kanom, kanom Doue on Tad !
- 2- Burzudou braz 'neus greet 'vidom
Doue Santel dre e halloud,
E garantez a-dreuz ar bed
En em zispak evidom toud,
Hag a bado dreist ar stered
E kalonou an dud a beoh !
- 3- Dre nerz e zorn, an dud lorthuz
Zo izelleet beteg douar,
Ar re vihan a ouel e-kuz
A dañv eur joa bepred leun-barr;
Ar re 'veve dindan an naon
Biken bremañ n'o-dezo aon !
- 4- Diwall a ra bemdez e bobl,
E peb amzer, dre garantez;
E bromesaou 'zo 'vid an oll,
Evid peb den e vadelez;
Da virviken meulom an Tad,
Ar Mab hag ar Spered Santel !

**PIOU 'NEUS KLEVET
TRAON AR HALVAR**

- 1- Piou 'neus klevet 'traon ar Halvar
Pedenn ar Vamm, pedenn heb par ?
Malet eo bet he Mab dinamm,
Gwasket eo bet dindan ar zamm.
- 2- Ne ouie ket, p'oa bet ganet
He 'faour-kêz Mab evid ar bed,
'Nije klasket beza ken mad
'Vid 'n dud nahet hag emzivad.
- 3- Ne ouie ket 'nije karek,
He mabig dei, hada an éd,
En eur glevet ha savetei
Ar plah flastret heb barn anei.
- 4- Ne ouie ket e vije bet
Ar pennou braz, heb gwir ebed,
'Vel ar gwesped, ouz e dregas
Hag e spega ouz koad eur groaz.
- 5- E-tal ar groaz e ouel ar Vamm
War gement den a zoug eur zamm
Ha pouez eur groaz, heb gelloud ken,
Dindan ar wask, beza eun den.
- 6- E-tal ar groaz, heb krena ken,
E ro Mari he Mab d'an den;
Kavet 'deus c'hoaz 'n he dienez
Peoh 'vidom-ni ha karantez.

Parce Domine.



Arce Domine, parce populo tuo : ne in eternum irascaris nobis.

EURUZ

- 1- Euruz ar re 'zo paour a galon,
Rag dezo eo ar Rouan-telez,
Euruz ar re 'zo leun a zouster,
Rag an douar a vezo o lod.
- 2- Euruz ar re o-deus da ouela,
Rag frealzet e vint ganeoh;
Euruz ar re a zervich Doue,
O gwalh a vezo roet dezo.
- 3- Euruz ar re 'zo trugarezuz,
D'o zro e kavint trugarez,
Euruz ar re 'zo glan a galon,
Rag int a welo gloar an Aotrou.
- 4- Euruz ar re a zo tud a beoh,
Bugale Doue e vezint;
Euruz ar re 'houzañv 'vid Doue,
Rouan-telez Doue a vo dezo.

MISTER JOAUIZ

- D. Ni ho salud, o leun a hras, Gwerhez da oll viskoaz,
Rag da Zoue plijet ho-peus, e-touez an oll gwragez !**
- 1- E Nazared, er Galilé, eun él e-neus laret :
«Mari, 'vid beza Mamm Doue, c'hwí a zo bet choazet.»
 - 2- En eur gerig euz ar Judé, Santez Elizabed,
A zigemer gand levene Mari deut d'he gweled.
 - 3- E Betléem, war blouz eur hraou, Jezuz a zo ganet;
Gand an élez, war ar méziou, ar helou 'zo brudet.
 - 4- Jezuz d'an Tad 'zo kinniget gand Jozef ha Mari,
Ha Simeon ouz e welad 'neus kanet meuleudi.
 - 5- Mari a glask he mab kollet, noz ha de, en anken.
Ho Mab en Templ a zo chomet, Mari na ouelit ket.
 - 6- Mil bennoz deoh Mamm da Zoue 'vid ar mab 'peus savet.
Pedit evid ar vugale, ma vint bepred karek.

An Aotrou Doue ganeoh.
 Ha gand ho spered.
 Ho kalon d'an uhel.
 Troet eo warzu Doue.
 Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou.
 Just ha santel eo.

Ar Bater :

On Tad hag a zo en neñv,
 Hoh ano bezet santelleet,
 Ho rouantelez deuet deom,
 Ho polontez bezet greet war an douar evel en neñv.
 Roit deom hîrio or bara pemdezieg,
 Pardonit deom or pehejou, evel ma pardonom d'ar re
 o-deus manket ouzom;
 Ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
 Med on diwallit diouz an droug.
 Deoh ar Rouantelez, Aotrou Doue,
 Deoh peb galloud ha peb gloar da virviken.

EIENENN AN DOUR BEO

- D. Eienenn an dour beo a redo 'vid atao,
 Levenez a c'hwezo, Mab an Den a zeu endro.
- 1- E peb kalon a glask bepred AR WIRIONEZ,
 E peb kalon a had er bed AR GARANTEZ,
 E TIRUILL AN DOUR BEO !
- 2- E peb kalon a zao bepred GAND 'N DUD NAHET,
 E peb kalon a ro d'ar bed EUN TAMM KENED,
 E TIRUILL AN DOUR BEO !
- 3- E peb kalon a vev bepred AR BAOURENTEZ,
 E peb kalon a stourm er bed 'VID AR VUHEZ,
 E TIRUILL AN DOUR BEO !
- 4- E peb kalon a vag bepred SONJOU A BEOH,
 E peb kalon a lak ar bed DA GANA DEOH,
 E TIRUILL AN DOUR BEO !

EURUZ AN HINI

- D. Euruz an hini a garo Doue euz e oll galon hag e oll ene.
- 1- An den a blijio da Zoue on Tad,
 A vo diwallet ha diwallet mad.
- 2- En ti hag er park, dre oll, deiz ha noz,
 Mestr ar bed warnañ a skuillo bennoz.
- 3- Gantañ e bried hag e vugale
 O do perz bepred e bennoz Doue.
- 4- Evel eur wezenn douret he gwrizioù,
 E tougo frouez, deliou ha bleuniou.
- 5- Laouen er vuhez, laouen er maro,
 gand an êlez vad d'an neñv e pigno.

SANTEL

Santel, Santel, Santel an Aotrou Doue, Mestr ar bed.
 Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar.
 Hozanna e barr an neñvou.
 Benniget an hini a zeu en ano Doue.
 Hozanna e barr an neñvou.

ADOROM OLL

Adorom oll, e sakramant an Aoter,
 Doue kuzet, Jezuz, or Mestr, Or Zalver.
 Sperejou evuruz, Elez ar Baradoz,
 Gand karantez a dan, meulit-heñ deiz ha noz.

GALVET DA BRED

Sul Fask : gousperou. (To)

Galvet da bred an Oan Jezuz,
 Ganeom on dillad kaer gwenn-kann,
 Kanom d'ar Hrist meuleudi splann. Allelouia !

Goude beza trehet ar bed,
 Ar Hrist a zao leun-barr a sked,
 A zigor deom peoh ar bed all. Allelouia !

C'hwi eo or Pask, Krist an Aotrou,
 C'hwi eo an Oan sakrifiet,
 C'hwi eo bara on eneoù. Allelouia !

'Vid ma vezoh atao, Jezuz,
 Levenez Pask or halonou,
 Diwallit mad on eneoù. Allelouia !

Da Zoue Tad, gloar ha meulgan,
 Ive d'ar Hrist savet da veo,
 Ha kemend-all d'ar Spered Glan. Allelouia !

MAGNIFICAT

Magnificat • anima mea
 Dominum • et exultavit
 spiritus meus • in Deo salutari
 meo ;

• quia respexit humilitatem
 ancillae suae : • ecce enim ex
 hoc beatam me dicent omnes
 generationes ;

• quia fecit mihi magna qui
 potens est • et sanctum nomen
 ejus ;

• et misericordia ejus a
 progenie in progenies • timen-
 tihus eum.

• Fecit potentiam in brachio
 suo ; • dispersit superbos
 mente cordis sui.

• Deposuit potentes de sede
 • et exaltavit humiles.

• Esurientes implevit bonis •
 et divites dimisit inanes.

• Suscepit Israel puerum suum,
 • recordatus misericordiae suae.

• Sicut locutus est ad patres
 nostros, • Abraham et semini
 ejus in saecula.